

- 45 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

100. GODISSEREZ

( folленнou 34, 39-40 )

Teir noz zo na meus kousket bane  
An noz a zeu na rin ket adare.

hag o klevet eun aer viber  
e kana var bord ar rinvier

ag e lavar dre he c'hwiban  
nen deus euret nemet eunan.

ag e lavar dre he ie  
nen deus eb ken nemet eun euret.

An eb a zemez gant e c'hrass vad  
ag a frez gant eur goal pennad  
Deus an diaoul a ra kontrat.

Deus ar paradoz a ziستak kren  
evel eur brank deus ar vezen.

Ag e zeo distaget ken net  
evel ar c'holo dimeus an ed.

Kerc'het e voa ar c'hemener  
Dober dar plac'h e habid euret.

- Kentoc'h e iaffen gant an diaoul, emezi  
evit ne daffen gant al losten ze da eureuji

eun dichentil a deuas en ti  
evid klasq tan da vutuni.

hag en mond a gwiska al losten  
a dabord e plijas d'ar fumelen

- C'hwi ar c'henta a meus pedet  
mar plich ganeoc'h, na vankit ket.

Diziou kenta e man ma euret  
mar de o vadelez donnet.

Pa voa deut deiz an euret  
an oll a voa estonnet.

- 46 -

Kent ma tostaent deuz an oter  
e hent ken du a Lusifer

Fa diskarger ar gwin er veren  
e ve evel an naouefen.

Dre ma pellaënt deuz an illiz  
e hint ken kaer a fourdriliz.

Eur belek iaouank voa e-touez :

- Tud iaouank an euret, laket evez  
an aërouant zo en on touez.  
....

- Debonjour dec'h sonnerien an euret  
a brac awoalc'h eo bed ar banket?

- Brao awoalc'h eo bed ar banket  
Med ar plac'h a euret zo dianket.

- Mar eo ar plac'h a euret eo e klasket  
Deud ganem ni ag o goëlfet

- Kontant bras oun de goëlet  
Kar non bo ni droug ebet.

En ivern pa int bed diskenet  
e voa en eur gadeur allaouret.

- Debonjour dec'h, sonnerien va euret  
a deud oc'h d'an ivern dam goelet.

Va c'hoas arc'hant a va chapelet  
Ag ive va goalen euret.

Kassit-hi dar ger dam briet  
a zo intaon noz e heuret.

Evel ma e deus roêt e traou biniguet  
et kroas arc'hant, e chapelet ag e goalen euret  
Kreis an tan e bed stlapet.

Teir leo var dro dan ivern  
e eus glevet eur griaden  
en eur lavaret aïou, allaz  
aman souffrer tourmanchou bras.

~~~~~

Jannton Charlès, 10 févr. 1851

~~~~~